

SON AL LAPOUSED NOZ

435

Ehi-laouet brema Paotred ar vro ma eurson a-ze gret vid ar mare Ganin-me,
 Di-war ar Zujet Deuz al la-pou-red A lod ar Euz-jel En Breiz-I. -i-jel War ar-
 meaz ha barz ar Louvou eo pli-ja-dur o gwe-led Oc'h o-ber o zammou mestrou o tiz
 -ren-vel ti-ran-ter, Seo int, ha lard ha ko-lou hag c'houzet o fr-gant la
 gouth Ru o fen-nou War o dioustroez Me lar d'oc'h paotred di-fout

Diskan

« Maleur, e leront
 D'an dud divergont
 Ha na heuillont ket hon roudou
 Nag hon c'homzou !
 Ni ho diskuillo
 Barz hon journalio
 Ha dar pr-f-t
 E vezo skrivet.

II

Diwallit ! Ar gouarnamant
 Zo a du gant ar re-ze,
 Bet deuz o zu, pe otramant
 C'houi a v'êjo goudeze.
 Gret e vo d'oc'h deuz ar gwasa
 Kresket vo d'oc'h an taillou,
 Chouket vo d'oc'h war ho tiouскоа
 Pataoutou ha foncherou.

Diskan

Red e vo senti
 Pe'tramant terri,
 Red e vo c'hoaz kemer an hual
 Vel gwechall,
 Dougen eur c'habestr
 Douja deuz ar mestr,
 Pe fouet al lezen
 Strako zouden.

III

Forz ze d'ê petra da ober
 D'ar re zontont ket 'veltê ;
 Kemend den a zo fonksioner
 Neuz peb droët en de hirie ;
 An dud en karg, hep douetanz,
 Pa c'hal font a vo mestrou
 Rag aliez maerieu a Franz
 Zo kac'herien o bragou.

Diskan

En meur a barrez
 Itron skolerez
 A vo breman eur rouanezik
 Er vroik ;
 Hag ar skolaërien
 Eat kuit ar frezien
 Na rent ket a fout
 Deuz neb galloud.

IV

Hudur eo gwelet 'n hon amzer
 Ar Re-Ru e penn an traou,
 Rag oc'h heuil anê e weler
 Peb fripoun hep laret gaou.
 Mar zo er vro daou feneant
 Ha daou lankon dizoue
 'Reze vo ar gouarnamant
 A reno war ar c'hontre.

Diskan

Ar reze hopo
 E-kreiz ar ruio
 Hag a gano soniou gallek
 N'intentont ket !
 Vefe ket kredet
 Int sivilizet
 Pa griont : Hou !
 Vel toud ar c'hoajou.

V

En gwirionez, kamaladed,
 Fentus eo gwled anê !
 Hô, list ah-nomp da laret
 Eo ridikul an dud-ze !
 Ma list da ober eur chamson
 Diwar benn paotred ar « C'hlik »
 N'ouzon ket d'ê skleroc'h patron
 Vid sovajed an Afrik.

Diskan

Hou ! Hou ! emezé !
 Hou ! Hou ! adarre,
 Ar Seurezet hag ar Galoten
 Na feil ken !
 D'an traon an Iliz
 Bevet an Hostiz ! !
 Ha gouarnamant
 Ar Gwin-Ardant ! ? !

VI

Kelennadurez

A benn ar votadek kenta
 Poent e vefe 'n em gemer,
 Ha kas eur reujat da iota,
 Ar re 'deuz karget o rer.
 Poent eo brema klask ar remed
 Ha pellaat deuz an enor
 Ar re 'deuz 'n em dizenoret
 O trahisa an Arvor !

Diskan

Kriomp asamblez
 Na blegimp jamez
 D'eur gouarnamant n'eo mignoun
 'Med d'an Heilloun,
 Chomomp dishual
 Hag uhel hon zal,
 Difennomp bemde
Al Liberté !...

AN DORNER.